

Alan Stivell, Dugelezh Vreizh

Warlec'h bloaz naw c'hant e teuas ar Vikinged
Da vout startoc'h a' dizoujusoc'h
Deit int a-benn da dorr pep aozadur 'barzh Breizh

Pa teuas ar peoc'h endro, a-drugarez d'Alan Varweg
Kultur ha yezh ar C'Hallaoued en-oa gwraet un toull bras 'ba'Breizh
Ba'vro ur bern renerien 'oa doh kultur a' doh yezh estren
"Duc-souverain"; Alan en em hanwas: n'oa ket prest da vout debret Breizh gant
broio all
Dugelezh Vreizh ur vro dizalc'h 'jomas e-pad c'hwec'h kant bloawezh c'hoazh
distag doc'h Bro-C'Hall

Politikerezh estren Breizh 'genboueze etre 'n diw vro vras
Politikerezh estren Breizh 'oa etre Bro-Saoz ha Bro-C'Hall
'Wid Frans 'n aristokrated, hag an dud vihan 'oa 'wid 'Saozon
N'oa ket don 'barzh o c'halon abego-se ar bobl vreton

'Bern breselio 'so bet gant ar Vretoned
Eneb d'ar Saozon hag eneb d'ar C'Hallaoued

Met Breizh 'jomas ar vro aet ar pella war hent an demokrasiezh ba'n Europa
"Den-gentil"; oa galwet pep Breizhad 'wid diskouezh 'n-oa pep kouer skoazell al
lezenn
N'eus ket anawet hon tud-kozh na servaj na Bresel-kant-bloazh
Plado arc'hant 'barzh pep ti-plouz oa araog trec'h an arme c'hall
E bloawezhio diwezha pa oa c'hoazh hor bro-ni dishual
Ba' vroio pinwidika ha war vor ba'mesk ar re krenva.